

(49)

Ar Pried mad.

Var ton ar Persou barves.

Briegou ar c'hontre, diredit d'am zelaou,
 Ma cænin eur c'hélou ha n'en deo qet eur gaou,
 Var sujet eun ozac'h, perlezen ar voaset:
 Etouez ar re qiella me a meus er choazet.

Pa voa Fanch den yaouanc, e teu da zarempred
 Jannedic, ar goanta demeus an oll merc'hed.
 Eur blijadur evoa o velet ar c'houbl-se:
 O dereadeguez d'an oll calz a blije.

Fanch, a galon dener, ha gant eur vouez doucie,
 A lavare bemde d'e vestrez Jannedic:
 O va Jannedic qez! ô va oll garante!
 Te reno em c'halon ha bemnos ha bemde....

(50)

Clêvet meus lavaret, pa vezer demerzet
 Ve arichou chican etre an daou bried:
 N'ellân qet credi ze, rac, n'en em garer mad,
 Na deuer qet michañ d'en em darabustat.

Mes, n'eus forç, eme Fanch: mar teufe din biqen
 Santout an teuteuc (1) o reded dre va fenn,
 Eur bouchic diganed, ô va Jannedic qez!
 Am yac'hafe ractal hac evit eur james.

Elesl, Fanchic qez, ne vo qet dies din
 Donet d'as contanti, va mignon, va mibin:
 El lec'h eur poq na daou, me roy did dre doucen
 Evit miret na vi mouzet ouzin biqen.

(1). [Le ms. porte un renvoi (1), mais Lédan a oublié de mettre au bas de la page la note qui expliquait ce mot.]

124

Eur pennad mad e zint bet en o zieguez
 Hep an disterra comz d'ellout feucal james ;
 Mes Janned paour anfin e devoe boutou bër,
 Daoust ma voa he Fanchic dey fidel en antier .

Fachiri a gavas etre Fanch ha Janned,
 Hac o zieguez voe an trista deus ar bed .
 Mâ ! eme 'r paour gëz Fanch, daoust ma zê euz dra gri,
 Ret e zêo demp, allas ! dont d'ey em separi !!!..

Janned, meurbet contant, a voa en eur joa vras
 O clêvet qementse demeus a bers e goas .
 Deomp, emei diouch-tu da gavet euz noter,
 Evit hon dispartî, d'êchui hor mizer .

(51)

Evit en em rentâ da vures an noter,
 E ranget mont en bouq ha treuji eur rivier .
 Fanch a voe ar c'henta er vag en em rentet,
 Hac e Janned qerqent voe ive ambarqet .

Euz tempest goal horrupl a deus prest da darza ;
 Brancellet voat terrupl, den n'ell chom en e za .
 Fourgasset voet qement, mar coejot oll en dour ;
 Pepini evitan a glasq en em zicour .

Fanch a voa neuer mad, a c'honit an douar,
 Mes e galon a voa treantet a c'hlac'har .
 Sellet a ras adrén, hac e vel e Janned
 Treinet gant nervz an dour, prest da vea beuzet .

Fanch, desesperet oll, o velet an danger
 Demeus e Janned paour, en em stlap er rivier .
 Pa dlefen, emezàn, mervel en fonz an dour,
 M'exposo va buerz evit mont d'he sicour .

Eurus avoalc'h eo bet da êruout ganti,
 Ha da laqat eur vrec'h da zouten anezî .
 Gant e zamm precius, enep d'an oll danger,
 Ec'h êru d'an douar abars nebeut amizer .

(52)

Qerqent m'en deveus Fanch he forjet d'an douar,

E ro dêi an oll soign; êchu eo e c'hlac'har.
 Gant ar joa voa ennân, e ro eur poq dezi...
 Euy huadaden douç a zorti anezh.

Deut enni e-unan, e ped Doue diouc'h-tu,
 Hac e sell tuezus en dro dêi a bep tu;
 Mes p'e deus hanavet voa Fanch he dasprener,
 E teu d'e vriata gant eur galon dener.

O daou en em bocjont gant teneridiguez,
 Hac e toujont ancouât peb seurt tregasseres.
 Lêzomp, eme Janned, da vigen an noter
 D'ober e gontrajou, da verbouilla paper.

Deomp d'ar quêr, Fanchic qêz; deomp hon daou da repos,
 Hac d'ey em digec'hi ebars hor gouele clos.
 Goulennomp ouz Doue d'en em garout bepret
 Ha da veza quier scoier d'oll priejou ar bed.

(53) Mar deu din birvigen dont da vouza, Fanchic,
 Ro din eur poqic stard, va c'halon! va routic!
 Hac e teuzo din sônc'hus an deiz eürus mân,
 Ma riñ did allazic, evet a rân bremân.

An exempl-mân, merc'hed, zo tēstēni certēn
 Penos e zeus atao eur galon vad ey den.
 Rac-se-ta, grit atao allazic d'ho pried,
 Hac e viot eürus epad ma voc'h er bed.

Lédan.

(Vol. VII, p. 49-53.)
 strophes non numérotées.